

Ar zoudarded a zo kouezet
Er brezel var an dachen,
Grit m'ho do, o Mamm venniget,
En env peb a gurunen.

Jesus, ha c'hwi, o Mamm zantel,
Zo en env ouz hor gortoz ;
Ni fell deomp dindan ho mantel
Mont ive d'ar baradoz !

J.-Y. Cozic

Quimper, le 10 février 1922.

Imprimatur,

P. MESSENGER, v.-g.



BN1-3-013

Ploneis

En enor da Itron Varia ar Veuzit

(Eun Doue a zeu d'ho kervel).

Diskan :

Itron Varia ar Veuzit
O Mamm vat, Mamm a drue,
Bepred ouzomp evesait,
Diwallit ho pugale !

Hon tud kos, o Gwerc'hez santel
O deuz aman ho pedet,
Ha bodet dindan ho skoazel
Grasou Doue o deuz bet.

Ni d'hon tro a, deu d'ho chapel
Da bardona, da bedi ;
Ar c'hristen a zo ho pugel,
Ho chapel a zo e di.

Kaera gras : gallout saludi
En he zi Mamm hor Roue !
Pebez enor, pebez dudi :
Kaout da yamm Mamm hon Doue !

Eur vamm vat d'he holl bugale
A zo digor he c'halon :
Ni a c'houlen ho karante
Gwerc'hez Vari hon Itron :

Pa oa Jesus c'hoaz bugelik,
Gourvezet var eun tamm pleuz,
C'hwi bede dirazhan sioulik,
Epad ma kouske didrous...

Pa dec'he dirag Herodez
Ganeoc'h ha gant ho pried,
C'hwi e starde gant karantez
Var ho kalon ankeniet...

Pa chommas, diouzoc'h dianket,
En templ gant an doktored,
Gant anken ho peuz e glasket
Ken a oe ganeoc'h kavet...

Gant enebourien kounnaret
Pa oe laket d'ar maro,
Var ar C'halvar, Mamm glac'haret,
C'hwi danvas poaniou garo...

Ho kalon dener bruzunet
C'hwi varvas, hag en envou
C'hwi oe gant Jesus kurunet
Rouanez an holl grasou.

Mamm ar paour kez emzivaded,
Ni ho ped, hor zelaouit !
Penez e vefemp dilezet,
Ganeoc'h, Itron ar Veuzit !

Azalek hor c'havel ive
Ni aliez 'zo poaniet,
Ha dre ma kertzomp er vue
Ez omp muioc'h-mui sammet.

Ni hon euz kalz enebourien
Gwasoc'h eged Herodez ;
Piou c'hellfemp galver d'hon difenn,
Nemedoc'h-c'hwi, o Gwerc'hez.

Kalonad 'reomp deoc'h avechou
O kerze! var an hent fall :
Hon diwallit diouz hon techou
Hag hor mirit didamall !

Hon diwallit var an douar
'Vel gwechall ho Mab Jesus,
Rag aon hon euz d'ober glac'har
Deoc'h, o Mamm garantezus.

Ni zo bresk, dister ha dinerz,
Hor skoazellit, o Mamm vat,
Beteg m'hon devezo holl perz
En glear Jesus hag e Dad.